

AN AMZER

GWENER 29 C'HWEVRER 1980

NIVERENN 13 4 FAJENN 2 LUR
2vet bloavezh Bep Gwener

Mererezh, Skridaozerezh:
2 straed ar Richardiere
35100 ROAZHON

"Breizh&Afghanistan"

resisadurioù
pe:

SPERED AR GELAOUENN

N'eo ket boazet AN AMZER da embann al lizheroù resevet nag ar respontoù. Koulskoude, eo bet kavet pouezus embann ul lizher hag ar respont, a vo kavet ganeoc'h da heul.

AN AMZER.

D'ar 25/2/80

"...ne vezo ket adnevezet va c'houmanant, rak n'on ket a-du gant ar menozioù dibunet en niv. 9 diwar-benn BREIZH & AFGHANISTAN. Dav e vefe a-raok skrivañ anavezout mat an danvez, hag evit ar skrivagner deskiñ mat istor Breizh. Ne voe ket evel-se an traoù e Breizh gant spered ar veleien (cf. Rennes: "Hist. des Diocèses de France", nevez embannet). Ne voe ar veleien a-enep an dispac'h nemet dre an heskinerezh. Ha memes tra evit ar chouanted: ur stourm evit ar frankiz, ha setu tout.

Gwall a se evit ar gelaouenn met ne fell ket din harpañ ur follenn a varn an traoù en doare-se." (J.C. Pontmain53)

Ha setu respont M.S., en anv AN AMZER:

Roazhon, d'ar 27/02/1980.

"Kenvroad ker,

Emaomp o paouez resev ho lizher ha diouzhtu e respontan.

An Amzer a zo ur gelaouenn a geleier, hag e vez embannet ivez un nebeut pennadoù. N'eus menoz resis ebet gant ar gelaouenn, nag a du dehou, nag a du kleiz, nemet stourm evit Breizh hag ar brezhoneg. "Breizh hag Afghanistan" a zo bet skrivet gant ul lenner a vro-bPariz: n'eo ket ar pennad-se "spered" ar gelaouenn. Embann a reomp pennadoù liesseurt, evel

DIWAN: 3 BLOAVEZH DIJA!

Trizek skol Diwan a zo digor bremañ; etre 150 ha 200 a vugale a vez enno. Ar re-se ned eont ket en ur skol arall, evel ma veze graet a-raok. Un dra vat eo: alies ez eus re a zaoudegezh gant ar c'hevredigezhioù a ra war-dro ar

e-barzh n'eus forzh pe gelaouenn, e galleg koulz hag e yezhoù all.

Barn ur gelaouenn o lenn ur pennad hepken a zo, a gav din, un dra fall. Ar pennad-se en deus graet kalz trouz: gortozet ez eus bet ur respont, ur pennad o tiskouez pegen fall e oa marteze ar pennad-se: DEN EBET N'EN DEUS RESPONTET. Ha koulskoude e vefe bet embannet diouzhtu ur pennad a-enep. Klevet em eus ur bern tud o klemm diwar-benn ar pennad-se, met c'hwi eo an hini kentañ hoc'h eus kemeret ho pluenn evit skrivañ deomp. N'on ket barrek a-walc'h war an istor evit skrivañ va-unan ur pennad diwar-benn ar gudenn-se, ha n'em eus ket kalz amzer evit henn ober.

Neuze, perak embann "Breizh hag Afghanistan"? Evit gouzout hag eñ e vefe posubl sevel e Breizh hag e brezhoneg ur gelaouenn ma vo kavet e-barzh, e-kichen ar c'heleier, pennadoù skrivet gant tud, n'eus forzh peseurt menoz ganto, gant ma vefe ar brezhoneg ur yezh a fell dezho implijout ha Breizh ur vro (o hini pe get) a fell dezho difenn. Sevel ur gelaouenn (Kendalc'h pajenn 2)

NOTENN

Ar pennadoù sinet ne en-gouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho, ha neket ar gelaouenn.

AN AMZER.

brezhoneg. Piv 'zo skolidi Diwan? Bugale kouerien n'eus ket kalz anezho, met eus kement rummad ar gevredigezh e teu ar skolidi: bugale micherourien ez eus ivez, da skouer. Alies a-walc'h ivez ne oar ket kerent ar grouadurioù kalz a vrezhoneg: neuze ne c'hell ar re-mañ komz brezhoneg nemet er skol (iskisat tra!), hag un nebeut diaesterioù ez eus war an tu-se.

Hag ar skolaerien? Ned int ket holl brezhonegerien a-vihanig; hag int a vez o teskiñ d'ar vugale brezhoneg ag ar vro e-lec'h emañ ar skol, hag ar brezhoneg unvanet ivez.

Penaos ober evit digeriñ ur skol nevez? Dav eo da gentañ sevel ur poellgor skoazell da zDiwan: hennezh a vo diskleriet d'ar prefeddi diouzh lezenn 1901 (ur rener, ur sekretour hag un teñzorier a vo añvet). Dav eo da c'houde kas un teuliad da vurev-kreiz Diwan, e Brest (Ti an Holl, Penn-ar-C'hreac'h, 29200 Brest) gant an doareoù da gaout arc'hant evit ar skol, niver ar skolidi (5pe 6 d'an nebeutañ) a vo e-barzh, hag all... Ha dreist-holl eo dav dastum daou vilion a lurioù kozh evit lakaat ar skol da vont en-dro e-pad 6 miz. Hep an arc'hant-mañ ne vo ket posubl digeriñ ar skol. Evel ma welit ez eus kalz labour d'ober. Kalon vat deoc'h memestra!

Un dra arall c'hoazh: sañset e vo digoret er bloaz a zeu skolioù kentañ derez evel ma vez graet dija e Bro-Euskadi.

Ar skolioù Diwan a zo amzerda-zont Breizh, rak d'am soñj, n'eus nemet desevel ar vugale e brezhoneg nemetken, a c'hello lakaat ar brezhoneg da vevañ.

A.D.

etrevroadel

**AN DILABOUR
E BRO-ULAD**

Dilabour eo 6,1% eus an dud er Rouantelezh-Unanet er maremañ, met kalz uheloc'h eo an dregantad e Bro-Ulad (Ulster): 11,5%! War zigreskiñ ez a niver an dud implijet el labouradegoù: 34% e 1973, 26% hiziv. Ne weler diskoulm ebet d'an emdroadur spontus-se. Hervez armerzhourien e tremenfe an dilabour da 17% eus ar boblañs e dibenn ar bloaz! 90.000 den a vo dilabour neuze! Rediet eo ur bern tud da zivroañ evit klask labour e lec'h all: 10.000 bep bloaz!

GALLAOUED

O SEVEL LABOURADEGOÙ

E VIETNAM

Emañ ar c'hevredad gall Biderman o paouez sinañ un emglev gant gouarnamant Vietnam evit krouiñ ul labouradeg d'ober rochedoù er gêrbenn, Hanoi. Implijout a raio 400 den ha kenderc'hañ a raio 500.000 roched bep bloaz.

Hervez tud 'zo e vefe ar c'hevredad Citroën; darn eus ar strollad P.S.A.-Peugeot-Citroën, o klask en em glevout ivez gant gouarnamant Hanoi evit krouiñ er Vietnam ul labouradeg kirri-tan.

SPERED AR GELAOUENN

(Kendalc'h ar bajenn 1).
enn dieub eus pep strollad, dieub eus pep menoz politikel.
Gwelet em eus n'eo ket prest c'hoazh an holl vrezhonegerien da gaout ur seurt kelaouenn, ken boazet int da lenn ur gelaouenn a du dehou, pe a du kleiz, pe c'hoazh da lenn ur gelaouenn gristen a sav a-enep d'ar c'helaouennoù "sokialour," da lenn kelaouennoù sokialour a sav a-enep d'ar c'helaouennoù kristen...

Perak neuze sevel ur gazetenn a geleier ma vo kavet enni ivez pennadoù gant menozioù liesseurt? E pep yezh all ez eus seurt kelaouennoù (pemdez-iek dre vras). Perak ne vefe ket e brezhoneg?

Ne c'hellomp ket embann hepken pennadoù a blij d'an holl.

Goulennet hon eus ouzh an dud, pa gavont pennadoù na blij ket dezho, respont pe skrivañ ur pennad all a vefe embannet: se a zo spered ar gelaouenn.

Etre ar pezh a fell deomp ober hag ar gwirvoud, ez eus un toull, siwazh!, leuniet tamm-

ha-tamm.

Herzel da lenn ur gelaouenn, dre ma 'z eus bet embannet ur pennad na blij ket d'an holl, a zo un emzalc'h war-gil; kenderc'hel da lenn ar gelaouenn, o respont d'ar pennad-se, hag o tiskouez perak n'oc'h ket a-du ha perak eo posubl lavarout ar c'hontrol, a vefe un emzalc'h war-raok. Etre an daou, pe hini a seblant deoc'h frouezhus?

Kompren a reomp hoc'h emzalc'h (kompren n'eo ket bezañ a-du), met kompren a rafemp ivez emzalc'hioù tud 'zo goude bezañ lennet "Dezo war an Diorroadurezh er Gelennadurezh Katolik" (niv. 5) ha "lizher foran kaset da Brezidant ar Republik" (niv. 4). Pep hini eus hol lennerien a gavo un deiz ur pennad na blij ket dezhañ. Ma tigoumanant evit-se ret deomp neuze serriñ ar stal. Ur skouer: "Le Monde" (e galleg) a embann pennadoù a bep menoz politikel, relijiel, armerzhel..., zoken ma vez roet d'ar gelaouenn-se ur spered bennak gant tud 'zo (un tammig gwir avat).

BREZHONEK

RADIO ARVORIG

F. R. 3

skingomz

PEMDEZIEK (ket d'ar Sul)

KELEIER
07e20 Brest (OM & FM)
12e20 Brest (OM & FM)
12e25 Gwened (FM) e gwenedeg

SIZHUNIEK

DIMERC 'HER
"AR SEIZ AVEL"
10e15/11e00 Brest (FM) & Gwened (FM)

DIGWENER
"PEBR HA HOLEN"
10e15/11e00 Brest (FM) & Gwened (FM)

DISUL
"LIV AN AMZER"
11e00/12e00 Brest (FM) & Gwened (FM)
13e00/14e00 Roazhon (OM) & Brest (OM)

N'eus nemet an abadenn-mañ hag a vez posubl klevout e Breizh a-bezh.

skinwel

SIZHUNIEK
DIMERC 'HER
"NOZVAT"
19e50 (ket el Liger Atlantel)

DISADORN
"BREIZH O VEVAN"
13e30/13e50 Breizh a-bezh
"NOZVAT"
19e45 (ket el Liger Atlantel)

Skrivet hoc'h eus deomp: "Ne fell ket din harpañ ur follenn a varn traoù en doare-se": Ne varn AN AMZER tra ebet.

Ho trugarekaat a reomp evit bezañ kemeret ho pluenn evit reiñ deomp da c'houzout ar pezh a zo bet displijus deoc'h. Spi hon eus avat e kendalc'h tud 'zo d'hol lenn.

N.S.

UR SIZHUNVEZH E BREIZH

BRO LANUON-GWENGAMP

— War-dro 1500 den o deus kemeret perzh er vanifestadeg aozet gant poellgor difenn porzh hent-houarn Plouared, d'ar Sul 24 a viz C'hwevrer e Plouared. Savet ez eus bet ur skrid-goulenn evit harpañ an dileuridi damallet. Sinet eo bet ar skrid gant holl goñversantad Plouared. Skignet eo bet evit bout sinet en holl gêrioù, bourc'hioù ha keriadennoù Bro-Dreger.

— 11 den eus Pempoull, implijidi ar c'hCrédit Agricole, a zo aet maout al loto ganto: 60 milion a lurioù kozh o deus gounezet.

— D'ar Gwener 22 a viz C'hwevrer da eizh eur hanter ez eus bet un emvod e ti-kêr Landreger evit klask krouiñ er c'horn-bro-mañ ur skol DIWAN. An diviz a oz kaset war-raok gant eil-sekretour Diwan Breizh, gant skolaerien ha gant un den eus strollad skoazell Diwan Lanuon.

Displeget ha disklaeriet mat eo bet d'an holl selaouerien (22, an darn vrasañ tud yaouank) ar c'hudennoù hag an diaesterioù da drec'hiñ warno, met ivez al labour frouezhus evit ar yezh graet gant an trizek skol Diwan digoret abaoe miz Mae 1977 evit degemer 160 skoliad.

Evit bevañ, Diwan en deus ezhomm 160 milion bep bloaz, hag ar skod n'eo nemet 10 milion (karta Sevenadurel, netra gant ar Stad c'hall). Pep skol a goust 5.000 lur ar miz.

Pep hini a c'hell evel just skoazellañ DIWAN. Chomlec'h: Skol Beg Leguer, 22300 Lanuon.

Goulennoù Diwan a zo bet degemeret mat gant kuzulioù-kêr: Priel, Ar Vinic'hi ha Confort-Berc'hed. Fiziañs a zo evit re all.

Ur strollad skoazell Diwan a vo lakaet war-sav ha marteze, da c'houde, e vo krouet ur skol DIWAN e Bro Sant Erwan.

(kensk.)

BRO KEMPER

••• Raktres Atomva Plogo:
-Paket p'edo o vanifestiñ,

an Ao Ansquer, 60 vloaz, diwaller prizon war e leve, a zo bet lakaet en toull. Barnadenn d'ar Meurzh 26 a viz Meurzh. Dastumet, hi, e Kemper merc'h yaouank eilvaer Roazhon (an Ao Phliponneau) 'zo bet kaset diwar-dizh d'an ospital goude bezañ gwallgaset, emezi, en archerdi Kemper.

-Dibenn tro Vreizh poellgor enepderc'hanel ar c'hab: 17 ti-kêr o deus resevet anezhañ, 15 en un doare ofisiel.

-D'ar Sadorn 23 eo deuet da bPlogoñv an Ao Echaubard, prezidant gall kevrenn gwirioù mabden, da skoazellañ tud Plogo en o stourm. A-benn ar 7 a viz Meurzh e tevio an Ao Garaudy, prederour kristen bet marksour.

-Komunourien Penn-ar-Bed a zisklaer bezañ a-du gant an derc'hanel e Plogo, hag e lec'h all.

BERR-HA-BERR

— Ur skingomz vrezhonek a-hed an amzer, setu ar pezh a c'houlenn kreñv ar CELIB dre vouezh e guzul-enklask sevenadurel. Poent eo e lavar ouzhpenn sevel poellgor rannvro kuzuliañ ar c'hlev-gwel evel ma oa bet resisaet gant prezidant ar Republik da geñver e brezegenn e Pourzel-Breizh-Uhel, d'an 8 a viz C'hwevrer 1977.

— Emañ gant ar CELIB (poellgor evit studiañ ha startaat lazoù Breizh) ar soñj lakaat da vont dre ar vro adalek miz Ebrel, un diskouezadeg da lavarout penaos ober gremm (energiezh) gant doareoù nevez. Met, eme e brezidant, an Ao Le Douarin, e vo kazi dibosupl tremen hep an nukleel, ma fell deomp krouiñ trawalc'h a c'hreantioù debrer tredan ma 'z int.

— Medalennoù aour roet gant prezidant ar Republik c'hall d'ar gwellañ micherourien: en

AN AMZER

2 straed ar Richardiere
35100 ROAZHON

Kelaouenn sizhuniek
CPPP 62319

Rener ar gelaouenn:
Mark DECAMBOURG

KOUMANANTOU:

3 MIZ (12 niverenn):	
Reizh:	18 lur
Studierien, skolidi:	12 lur
Skoazell:	20 lur
6 MIZ (24 niverenn):	
Reizh:	36 lur
Studierien, skolidi:	24 lur
Skoazell:	40 lur
12 MIZ (48 niverenn):	
Reizh:	72 lur
Studierien, skolidi:	48 lur
Skoazell:	80 lur

KRF (Decambourg): 25.97V Roazhon.

Moulet ez eus bet 500 sk.
ag an niverenn-mañ

o mesk an Itron Aodren-Ar Goff (ficherez vlev) eus Lokmaria-an Arvor (Bro An Oriant) hag an Aotrou Le Royereus An Naoned.

— D'ar Yaou 28 a viz Meurzh eo bet bodet Kuzul Sevenadurel Breizh.

D'HOL LENNERIEN

• Hon digarezit ma ne teu ket er-maez AN AMZER bep Yaou pe bep Gwener, met re a labour a vez ganeomp evit henn ober. Labourer e vez e-pad an dibenn-sizhun, zoken.

• Dipitet omp rak AN AMZER ne gemero ket perzh e "Koun Nominoe" nag e gouelioù all, ken nebeut ez omp oc'h ober war-dro ar gelaouenn. Ne vo ket kendalc'het evel-se: ret eo deomp kavout tud all evit labourat ganeomp.

• Evit ar servij-kelaouiñ, tud o chom e n'eus forzh pelec'h: kenskriverien.

• Evit ar servij-gwask hag ar servij-mererezh, tud o chom e Roazhon pe tro-war-dro, zoken ma vefe evit UN EURVEZH bep sizhun. Trugarez.

AN AMZER.

GOUEL AR BREZHONEG

e PLABENNEG
14-18 MAE 1980

BUHEZ SEVENADUREL

DISPLEGADENNOÙ

●NAONED.-Raktres ALTER Breizh (gw. an niv. 6) a vo diskouezet d'ar Gwener 7 a viz Meurzh, aozet gant P.S.U. Breizh. Titouroù: C.N.C.C., 52 straed ar Marchiks.

●NAONED.- D'ar 4 a viz Meurzh 17eur e Breuriez ar Brotestanted, 3 straed Admiral Duchaffault, displegadenn a-zivout an disujidi vrezhon a nac'h ober o servij el lu gall en abeg da Vreizh.

STAJOÙ

●SANT-VISANT-WAR-LOUD.- D'an 8 ha d'an 9 a viz Meurzh: staj gouren (a bep derez), renet gant Padrig Olivier. Priz: 55 lur (gw. AN AMZER niv. 12).

GOUELIOÙ

●NAONED.- E La Frebaudiere d'ar Sadorn 8 a viz Meurzh: barrez werinel Ourvez, aozet gant Kelc'h Keltiek Ourvez.

C'HOARIVA

●PLOUGERNE.-Strollad C'hoariva Brezhonek Bro Bagan a c'hoario "Nomenoe-oe", skrivet gant Jakez Riou, d'ar Sadorn kentañ a viz Meurzh, e Kreac'h ar C'hamm.

●BREST.- Strollad ar Vro bPagan: Nomenoe-oe, d'ar Sul 2, er P.A.C. .

EMVODOÙ

●NAONED.- Bodadeg labour, poellgor-ren ar C.N.C.C., 52 straed ar Marchiks.

FIÑVSKEUDENNOÙ

●ROAZHON.- D'al Lun 3 a viz Meurzh e fiñvskeudenndi Arvor, ha d'ar Merc'her 5 e ti ar Yaouankiz hag ar Sevenadur "La Paillette" e vo gwelet "The Patriot Game". Gwelet e vez stourm tud Iwerzhon ha stourm an I.R.A. (Lu Republikan Iwerzhon). Santet e vez aergelc'h buhez an dud-se. Heuliet e vo ar film gant ur vreuradeg aozet gant "Kenstrollad Iwerzhon o stourm"; 4 hentdall ar Groaz Wenn, 35100 Roazhon.

A BEP SEURT

●ROAZHON.- Pred ar Vrezhonegerien a vo hevlene d'ar Gwener 21 a viz Meurzh, da 8eur noz, e ti-herberc'h ar re yaouank, 40 straed Montaigne (kirri-boutin: Francisco Ferrer). Titouroù hag emrolloù (a-raok an 10 a viz Meurzh) da: L. Louarn, 30 plasenn al Lisoù, 35000 Roazhon, pe da: S.A.E., 8 straed Huche, 35000 Roahon.

SPORTOÙ

MELLDROAD.

-Rummad kentañ:
Brest 3/3 Nancy
Naoned 2/0 Sant-Stefan
-Eil rummad:
Roazhon 1/1 Limoges
Kemper 2/0 Noeux
Gwengamp 4/0 Reims
-Trede rummad:
A.S. Brest 0/0 Lisioux
St Brieg 4/1 U.S. Ar Menez
St. Brest / Laval: daleet
U.S. Konkerne 1/2 Racing
-Pevare rummad:
St Nazer 1/0 Getigné
Kemperle 3/1 UCK Gwened
Kastell-Paol 0/0 Luçon
Ar Geoteg 0/0 Kemper
Velos Gwened 2/1 Añsiniz
Penmarc'h 1/1 Cholet
PTT Naoned 1/1 Montroulez


CHABROL HA BUGALE

AR STARTIJENN

Bec'h 'zo war an Ao Chabrol, fimaouer brudet, ma 'z eus unan, hag a zo o klask ober fiñvskeudennoù gant levr brudet P.J. Helias: "Bugale ar Startijenn" ("Le Cheval d'Orgueil" e galleg). Betek-henn n'en deus kavet kêriadenn na plas dereat evit ober e fiñvskeudennerezh, bremañ e vez skignelloù-skinwel ha tredan e pep lec'h. Bugale giz gwechall n'en deus ket kavet ivez: war pemzek bet dibabet, da gentañ, n'eus hini ebet par da Ber-Jakez bihan. Ouzhpenn-se emañ o klask gwiskamantoù giz gwechall gozh. Ma chom pilhoù ganeoc'h en ho krignol n'ho po ket nemet kas anezho d'e vevel breton d'ar chomlec'h da heul: "Ti an Holl," Pont 'n Abad. **JOBIG.**

romant
diwezhañ

PER DENEZ



**GLAS EVEL
DAOULAGAD C'HLAS
HA NE OANT KET
MA RE**

112 pajenn

35LUR* war baper kaer

27LUR* war baper all

embannadurioù
AL LIAMM

• priz-gwerzh e ti QUEILLE:
47str. Itron Varia 22 Gwengamp
10% mizoù-kas